

# Tân-Gwal Koat-ar-Roc'h

Tôn : *Breudeur ni glev ho klemmo.*

'Tu ar sao-heol da Goadout, etouez ar gwe kuzet,  
'Boue niver a gant-vlaïo, eur c'hastel oa savet, . . .  
Er c'hastel-ze e chome eun den anveet mat,  
Eur c'hristen eus an dibab, an otro a Roscoat.

An drizekved de a Eost, hanter-noz tremenet,  
Perc'hen an ti hag e dud, gant spont 'zo dihunet,  
An tân a zo er c'hastel, e keit kousk an dud kez,  
Tân ha moged, mesk-ha-mesk, a garg an ti a-bez !

Hanter-wisket, an otro red trezek ar skalier,  
'Wit dihuni diou blac'hig, kousket 'krec'h ar maner ;  
N'hall ket, siouaz, mont pelloc'h, ar skalier 'zo henvel  
Ouz chiminal eur forn vras, . . . Disken 'ra 'lec'h sevel.

E keit-ze, an diou blac'hig, diou c'hoar 'n em gar da  
Dihunet ive d'o zro, a glask eun tam dilhad, [vad,  
Unan a zigor an nor 'losk kement a voged,  
Ma fell d'ei, 'rôk gôut 'pez 'zo, 'n eun tôl bean mou-  
[get!

Spontet ha berr ewarni, e red a-dreuz d'ar gamp ;  
Mont 'ra betek ar prenestr, ewit ober eur lamp,  
Eur lamp 'lec'h dije kavet ar maro 'n eur gouean,  
Rak he c'hamp a oa unan eus ar re uhelan.

Gant eur griaden skiltrus, an diou c'hoar, a unan,  
A c'halv forcher ar c'hastel, . . . « Josen ! . . . Josen ! . . .  
[an tân ! »

Ar forcher ha daou den-all a glev ar griaden, . . .  
Dustu e lampont e-maez, 'n o c'hreiz spont hag anken.

Eur skeul hirr a zo savet 'trezek kamp an diou blac'h,  
Mes, siouaz ! kalz re verr eo ! . . . Hag an tân-gwall,  
[gant mac'h,

'Dalc'h da greski er c'hastel,... Red e vo 'ta mervel !...  
« Sikouret ho pugale, Mari, Gwerc'hez santel ! »

Ar c'hoar henan a gemer eul linsel, hag a lar :  
« Gant an linsel-man, disken betek ar skeul, ma  
(c'hoar. »

Ar plac'h yaouank soutennet gant dorn he c'hoar he-  
(nan,

Dre he zreid 'zo kemeret gant eun den ar c'hrenvan.

Mes kalon an den mat-man 'zo krenvoc'h 'wit ar skeul,  
A deu da derri kerkent ma 'zo unan d'e c'heul ..

Disken 'reont koulskoude,... unan a zo pare,

Mes eben, 'kreiz ar maged, da vougan 'zo dare !

Ar memes den kalonek, kât gantan eur gorden, (kren,  
A bign er skeul-hirr, hep aon, daoust ma 'z eo torret  
Diwar vek eur forc'h houarn, ro ar gorden neuze,  
D'ar plac'h 'zo a-istribilh o klask ar gorden-ze !

Tapet ganti ar gorden, e adsav d'he skoulman,  
Endro d'eur varen houarn,... Ar skoulm 'zo ar fallan,  
— Eun hanter-skoulm gret d'ar red — hag ar plac'h  
(en em lez

Da zisken 'hed an doen, he fianz er Werc'hez !

P'eo diskennet d'an douar, d'an dud 'zo diraki,

E lavar : « O na brao eo bean bugel Mari !... »

Dorn ar Werc'hez, a dra zur, ar gorden noa skoulmet,  
Galloud ar Werc'hez, sur mat, eno tleer gwelet !

Ar c'hastel'a zo dewet, e dud a zo pare,

Ne welfer, a c'houdewez, e douriou 'touez ar gwe,

Mes sur on e vo klevet diou c'hoar o lavaret :

« Gant ar Werc'hez, ni gred start, ouz an tân 'omp  
(tennet

Da berc'hen ar c'hastel-ze, me 'garje lavaret

Al loden a gemeran en e boanio kalet ...

D'e dud 'kinnigan ma gwerz, d'am broïz lavaran :

Eur wech ouspen, ar Werc'hez burzud deus gret aman.

X...